

ARVOR

4e bloavezh (Niv 3 ar rumm nevez)

25mezheven 1944

Embannet e stumm ul lizher sizhuniek
gant FRANK KELTIEK BREIZH
19, straed ar Moneiz. ROAZHON.

Netra na den na vir ouzhipp
da vont war-du ar pal.

KELEIER. Netra a bouez ne c'hoarvezas e Roazhon etre an 18 hag ar 25 a
mezheven

AR SKOURR 3 KROUET Skourr 3 B.A.F. a voe krouet e Lanvollon. Degas a reomp da
soñj e voe krouet ar skourr I e Roazhon hag ar skourr 2 e Gwengamp. Pelec'h e
voe krouet ar skourr 4 ?

REHAOS SEVEL UR SKOURR ? Da sevel ur skourr B.A.F. e ranker kaout 3 den da
vihanaf, a vo greeet anezho ar Rener, ar Sekertour hag an Tefizorier. Mar deo ur
skourr lec'hel e rank 3 den-se bezañ adizeien tost a (walc'h evit en em vodañ
oes.

LABOUR AR SKOURROU Pep skourr lec'h a dle en em cwestlañ d'an oberrerezh
brezhonek e-barzh an dachenn merket dezhañ (peurliesañ er c'hanton). Deou dra
en deus d'ober:

1° Seveniñ al labour roet gant burev-kreiz Roazhon (da skouer, bre-
mañ skignañ ARVOR ha kas keleier d'ar Burev-kreiz).

2° Ober ar pezh a zo a bouez er c'hanton (da skouer, derc'hel ul
levraoueg, aozañ kenstudiu, kenc'hoarioù, kenvaleadennoù h.a.). Amañ e ra
pep skourr diouzh e soñj.

DECLENN START Pep skourr a dle en em vodañ ur wech bep sizhun.

AN 8 A VIZ GOURE Dalc'hit soñj e tle an 8 a viz gouere, deiz-ha-bloaz
pennvanidigezh ar Brezhoneg, bezañ un devezh gouel, daoust pegen doanuis eo
sted hor bro d'ar mare-mañ/

LABOURAT DAoust DA PEP TRA Arabat diskregiñ diouzh al labour brezhoneg war
zigarez an darvoudou. Da bep ezel FAGAD AR FIZIANS ober un dra bennak, zoken
mar deo dispartiet diouzh e genseurted. Kennerzhet e vo o soñjal ez eus tud all
o labourat eveltañ e pep korn, hag e touge frouezh ar pezh a ray, c'hoarvezet
e c'hoarvezo.

PETRA OBER GANT AN NIVERENN-MAN Hec'h adskrivañ 3 gwech hag he c'has dre
ar post evel lizher da 3 den (c'hoalec'h e galleg). He skignañ tro-war-dro,
er barrez, pe er c'hanton ma c'hallier.

Touid' a ran en eus adskrivet an niverenn-mañ hep kemebet.

Sin: Jos Youinou

ARVOR

4e bloavezh (Niv 180. Niv 4 ar rumm nevez)

2 gouere 1944

Embannet e stumm ul lizher sizhuniek

gant FRAMM KULTIEK BREIZH

19, straed ar Moneiz Roazhon.

Natra paden ne vir ouzhipp
da vont war-du ar pal

KELEIER a) Donarnenez strewet eo bet niverennoù ARVOR

b) Gwened ... Aenderc'hel a ra Kelc'h BRETON GWENED gant e labour sevenadur E Mezheven a voe lakaet en enezenn An Arzh un enskrivadenn en enor d'ar barzh JOUBIOUX evit kantved deiz-ha-bloaz e levr "Doue ha mem bro". Grataet en deus an Ac. Bellec, eskob Gwened, e vo gourc'hemennet gantañ deskiñ ar Brezhoneg er skolioù kerkent ha ma vo moulet ul levr-deskiñ. Strewet e vo kanton Gwened niverennoù ARVOR.

k) Plistin. Skol Blistin a voe serret d'ar 14 a Vezheven. Niverenn Arvor 51 (Niv 1 ar rumm nevez) a voe adskrivet ha skignet dre ar c'hanton ha pella.

d) Roazhon. Sioul awalc'h an traoù e-pad ar sizhun.

D'AN DUD C-UNAN Ar re n'int ket evit sevel ur Skourr B.A.F. a c'hell atañ labourer; skrivañ pennadoù pe levrioù zoken, studiañ ar yezh, al levrioù pe e-touez ar bobl. Ur skouer vat a zo roet gant Kerlann, eus Plistin, hag a zo o tastum ar gerioù implijet evit envel "Izennou ar c'harr" hag "harnez ar marc'h". An holl labourioù a dalveza diwezataoc'h.

Koulskoude, gwelloc'h c'hoazh eo kenderc'hel gant al labour kevret, sevel skourrou ar muiañ ar gwellañ .

SKOURROU "BAGAD AR FIZIANS" Hervez ar c'heleier hon eus bet ez eus bremañ 3 skourr B.A.F.: 1) Roazhon, 2) Gwengamp 3) Lenvollon. Deges a reas da sonj n'eus ezhomm evit sevel ur Skourr nemet eus 3 den o chom en hevele kanton, tost a-walc'h evit en em vodañ alies. Kefridi pep skourr eo skignañ ARVOR ha seveniñ al labour breizhek er c'hanton.

TAOLIT FLED Adskrivit an niverenn-mañ 3 gwech he kasit hi da 3 den evel lizher (chomlec'h e galleg). Darn ac'hanoc'h a zo bet kemennet dezho gant Burev-kreiz Roazhon da biv kas an niverennoù-se. Oushpenn-se, skignit ARVOR en ho kanton.

NIVERENNOU "ARVOR" Na vezit ket souezhet ma tegouezh ganeoc'h 2 pe 3 gwe en hevelep niverenn. Implijit an niverennoù-se eus ar gwellañ. Na vezit ket souezhet kennebeut ma ne zegouezh ganeoc'h niverenn ebet. Kendalc'hit atañ hep koll kalon.

Touiñ a ran em eus adskrivet an niverenn-mañ hep kenn ebet.

Sin: Jos Youinou

ARVOR

4e bloavezh (Niv 181,5 e rumm nevez).

9 gouere 1944

Embannet a stumm ul lizher sizhunviak
gant FRAMM KELTIK BREIZH

10, stradaed ar Moneiz Roazhon.

Metra na den ne vir ouzhipp
da vont war-du ar pal

GOUEL AN 8 A VIZ GOUERE. D'ar sadorn 8 a viz gouere, da 16 eur ez en
em vodas 25 brezhoneger e tu ar Framm Keltiek e Roazhon. Un doare goue
bihan a oa bet aozet gant B.A.F. evit lidañ trede deiz-ha-bloaz peur
vanidigezh ar Brezhoneg. Roparz Hemon a gomzas eus ar beurunvanidigezh
ha goude e tisplegas petra oa BAGAD AR FIZIANS ha peseurt labour a

SKOURR 4 B.A.F. SAVET Skourr 4 B.A.F. a voe savet e Kemper. Ar bodadeg
a vo greet hep sadorn. Setu amañ eta roll ar skourroù krouet betek-hen
1) Roazhon. 2) Gwengamp. 3) Lanvollon. 4) Kemper. Evit sevel ur Skourr
n'eus ezhomm aemet 3 den o chom en hevelep kanton tost awalc'h evit
em vodañ alies. Kefridi pep skourr eo skignañ ARVOR ha seveniñ al labo
brezhonek er c'hanton. Pelec'h e vo savet ar Skourr 5 ?

ER SKOURR 2 (Gwengamp). Graet e vez ar bodadegou d'al lun, da 16 eur
bodadeg an 3 a viz Gouere a komzas A. Galleg diwar-benn "penaos arouez
an distagadur". D'al lun 10 e tle H. Tangi komz diwar-benn ar c'hoariva
en Iwerzhon. Ar Skourr 2 en deus dibabet un anv, hervez en ali roet
gant ar Burev-kreiz. Dibabet eo bet anv Erwan ar Moal.

PRIZ AR ROMANT E-doug bodadeg an 8 a viz gouere e Roazhon e voe embann
priz ar romant. Mont a ra gant Roc'halann evit e oberenn "Ar Gorollere
vihan". Ar priz (3000 lur) a zo kinniget gant ti skridoù Breizh eus
Brest hag ar varnedigezh graet gant ar framm.

LENNEGEZH. Ouzhpenn ar romant "Ar Gorollerezh vihan" gant Roc'halann,
eus bet kelou eus ur pezh-c'hoari nevez gant Roparz Hemon "Sara", kend
h "Roperzh Emmet", hag eus div drêidigezh diwar an alamaneg "Aquis sub
mersus" gant Storm troet gant Per Denez ha "Troioù marzhus ar Baron
Munchhausen" troet gant Erwan Tranvouez.

FIZIANS: Hervez ar c'heleier degaset da Roazhon gant beajourion o to
eus eur a gorn, n'eus ket a dreuz noblec'h e Breizh, daoust d'ar brude
a red. Pezh a c'hell reiñ kalon dimp eo argred diskouezet dre-holl gar
vrezhonegerion emskiantek da labourat evel gwechall ha startoc'h eget
gwechall.

TAOLIT PLED Adskrivit an niverenn-mañ 3 gwech ha kasit hi evel lizher
da 3 den (choslec'h e galleg). Skignit ARVOR en ho kanton.

Touiñ a ran em eus adskrivet an niverenn-mañ hep kenn ebet.

Sin: (Jos Youinou) ?

ARVOR

4e bloavezh (Niv I82.6 ar rumm nevez)

16 gouere 1944

Embannet e stumm ul lizher sizhunviak
19, straed ar Moneiz, Roazhon.

Netra na den ne vir ouzhpenn
da vont war-du ar pal.

KELEIER Keloù a zeu dimp eus ganedigezh ur varc'h e ti hor c'heneil Marc
AR LERR eus Kemper. Anvet eo bet Mari-Noela, hag an 8-vet bugel eo. Hor
gwellañ gouez hemennou.

NEDEENN "BAGAD AR FIZIANS". Evit ar re n'o deus ket an holl niverennou
ARVOR rumm nevez, e lakaomp unan ar reoleun:

BAGAD ar FIZIANS a voe savet e Roazhon d'an 20 a viz Mae 1944, e-pad Kendalc'
FRAMM KULTIEK BREIZH, evit seveniñ an doare gwellañ al labour brezhonek
daoust d'an diaesterioù a bep seurt.

PAL B.A.F.

1. B.A.F. a dle genel ur vuhez kevret etre ar vrezhonegerion emskiantek.
2. Diazez ar vuhez kevret eo an emvodañ: Pal kentañ B.A.F. eo eta lakkaat
e izili d'en em vodañ alies, war zigarez kenstudioù, prezegennoù, abadennoù,
c'hoarioù, baleadennoù h.a.
3. Eil pal B.A.F. eo lakeat e izili d'en em skoaziñ kenetrezo, en doare ma
kavo pep ezel atav ur skor digant an izili all.
4. B.A.F. ne glask ket kaout izili niverus. Klask a ra kemmañ kaout izili a
dalvoudgezh.
5. B.A.F. ne ra ket a vruderezh en diavaez. En e ziabarzh, e-touez e
izili eo e ra dreist-holl e labour. E se ez eo dishenvel-krenn diouzh
ar c'hevredadoù all.

SPIDM B.A.F.

1. Darn eo B.A.F. eus FRAMM KULTIEK BREIZH.
2. Bodet eo izili B.A.F. e skourrou. Kreizenn pep skourr eo an Triskin, unan
tri den : ar Rener, ar Sekretour (pe skriver), an Tefzorser (pe yalc'her)
3. An tri-den se a dle en em vodañ da vihanañ ur wech bep sizhun. Eoz'e
tloc'h eta chm en hevelep kêr, pe e kêrioù tost-tre an eil ouzh eben
4. Ar skourrou lec'hel a zo karget eus al labour en un dachennad-douar
merket. An dachennad-douar-se eo peurliesañ ar c'hanton, nemet un abeg
a ve d'ober dishañvel.
5. Skourroù all a c'hello bezañ savet, dezhañ palioù ispisial.

KASIT DIMP KELEIER. Ezhom hon eus da gaout keleier ac'hanoc'h, eus ho skourr
B.A.F., eus ho kanton. Studi ar c'hanton hag an darvoudoù a c'hoarvez enno
a dle bezañ darn eus ho labour. Kasit keleier dimp evel ma c'hellit ar
buennañ ma c'hellit.

TOUTIN A RAN EM EUS ADSKREMET AN NIVERENN-MAN HEP KEMM EBET/

Sin: (Jos Youinnou) ?

Dernier numéro reçu. Je ne sais s'il en est paru d'autres...